

Ur wezh m'edomp e Koadaskorn e-ti ur gour-
econtr dimp, e tiaweljomp, ma c'hoar ha me, ur
savadur war beg ur roz, en tu-hont d'an draoñienn.
Hañvalout a reas dimp bezañ ur maner, daoust ma
ne welemp na tour na touribell dezhañ.

Ma c'houlennjomp ouzh hon tad peanv e oa ar
maner kevrinus-se. « Keridwal a vez graet anezhañ, »
emezañ. Ma ris ma soñj etre ma roched ha ma chouk
e rafen ma chomadur ennañ un deiz...

Meneg ebet a Geridwal war ar c'hartennoù-bro
avat. Hogen biskoazh n'en deus fellet din gouzout
petra 'oa anv all ar savadur-se, na gwelet an talbenn
all anezhañ. Evit hon tad, n'en deus ken soñj bremañ
nag eus hon goulenn, nag eus e respont.

Evelkent e ouzon-me ez eus eus Keridwal, pa ne
'm eus paouezet a gavout bod enni, na da renkañ
e diogel he mogerioù, hunvreoù hag eñvorennoù,
geriennoù ha soñjezonoù...

Da Añjela Duval.
Da Erwan Seubil gKernaudour, “Evñig Kernaour”.

Trugarez vras da'm mignon Divi gKervella
evit e alioù fur ha poellek.

1

TRAMOR

MELEZOUR AN ENEOÙ MARV

Da Alan Heusaff

Dirak ar mor e hirc'hortoz,
En habaskter fresk ar serr-noz,
Kalonoù gwar ha glac'haret
Bet gant o fared trubardet.

Gant keuz ha reuzioù ezteuzet,
Netra er bed-mañ ne c'hedont,
'Met evned iskis an isfont
O floupo a-flav hag a-fet.

Deut d'e benn bremañ o remzi,
Dre garet diharz ha disi
Pa n'en deus gour oute soursi,
Ne van ken dezhe finvezhiñ.

Disket ha sec'h eo o selloù,
'N o ambloari karc'hariet,
Nag ar goullo ne welont ket
O troidellat er pelloù.

E ndra m' o c' hlis skeudoù disaour,
A-gelc' h ledan a-us an dour,
Dispaket-bras o divaskell,
Estlamm o garmadeg varvel.

Gwengamp, Miz Du 1994
Al Liamm, niv. 296-297, p.198

"Celtic Poetry Supplement", Carn niv. 100,
Winter 1997-98

SCÁTHÁN NA N-ANAMACHA MARBHA

C ois na mara ag síorfheithemh,
I mboige úr an tráthnóna,
Croíthe umhala atá buartha,
I ndiaidh a gcarad a thréig iad.

A g cumha is tubaistí traochta,
Gan súil le haon ní sa tsaol seo
Ach éanlaith aduaine an duibheagáin,
A alphas iad siar ar an toirt.

A ch 'tá ídithe a n-aimsir,
Le teann grá gan teora gan cháim;
Tharla gan bheann orthu ag neach,
Níl de bheart rompu ach bású.

S camall ar shúile gan deora,
Carcraithe atá siad i ndobhrón
Ní léir dá n-amharc an folús,
'Tá ón imigéin ag fáinniú,

I s scáthanna gránn' á slíocadh,
Cruinn ina gciorcal os cionn sáile,
A sciatháin ar leathadh timpeall,
Ní scaoll go dtína ngáir bhásmhar.

Troet en iwerzhoneg gant Éamon Ó Ciosáin
Celtic Poetry Supplement, *Carn*,
niv. 100, Winter 1997/98

GLOEDIG E RUZVEIN

Ur gloedig yaouank a Leon,
War e zorn dehoù ur falc'hon,
En-dro dezhañ ur porpant ruz,
Hag o tremmel ar mor trellus.

Ne zistag lagad diouzh ar mor,
Oc'h hunvreal el lestr tramor
En kaso e penn e eñvor,
E ouelioù gantañ bras-digor.

Ouzh e dal gwenn e sklêrijenn
Ar ruzvein hag an aour melen ;
Nemet e don e galon c'hlan
E talm dilavar ur varboan :

Bemdez-c'houloù 'teu da c'hedal
Al lestr kann a aodas gwezhall,
'N abardaevezh a Vezheven,
'Harz an tevenn 'vel un evn gwenn.

A ze neuze ez eorias,
Ur mizvezh kloz e c'hortozas,
Ar gloedig-se na veize ket
E oa d'ar mor e holl gaouded.

B et eo al lestr kaer diwar-wel,
Betnari a-dreñv an dremmwel ;
Ankouaet-krenn gant ar mor louet,
Betek e roudoù arc'hantet.

A r gloedig yaouank a Leon,
Kaer en deus sellet ouzh an donn,
Netra ne wel 'met an eon
'Koroll a-gor war ar mor don.

*Gwengamp, d'an 21 a viz Mezheven 1984
Al Liamm, niv. 297, p. 420-421*

*Savet war Ys tennet eus Renaissance de la harpe
celtique gant Alan Stivell.*

Haelwenn a oa merc'h ar roue Pellezeus Rouantelezh an Douar Gwast. Hervez un diougan e oa lakaet dezhi reiñ ur mab da Lancelod, Goulc'hoed (Galaad) e anv, hag a gasfe Klask ar Gral Santel da benn. Lancelod avat a oa e galon d'ar rouanez Gwenhivar. Gant skoazell he matezh e kemeras Haelwenn neuz ar rouanez hag e tremenas un nozvezh gantañ. Droug a yeas ennañ pa daolas fed e oa bet touellet ; pa ziskulias Haelwenn an diougan dezhañ avat, e torras d'e ernez hag e kemeras penn an tec'h, kollet e skiant gantañ ; bevañ a eure er c'hoadeier koulz hag un den gouez, ankouaet betek e anv gantañ. Er c'heit-se e c'hanas Haelwenn he mab.

Un deiz m'edo Lancelod o vale er vro ez anavezas Haelwenn tad he bugel. Ober a eure war e dro hag e teuas e-barzh. Ur pennad e vevjont o-zri e peoc'h e Breizh-Izel, e Kastell Goueled ar Forest. Lancelod ne voe ket pell o hiraezhiñ da Wenhivar avat, hag e treuzas Mor Breizh daveti.

Pa gomprenas ne zistrofe birviken, en em lezas Haelwenn da vervel ; goulenn a eure ma vefe gwisket he brozh kaerañ dezhi, lakaet he c'horf war ur vag, ha laosket ar vag-se da vont gant red an dour. Darn a adkav o far er bed all ; Haelwenn gaezh avat ne ray ket...

HAELWENN A ASKALOD

da Roparz Hemon

Regin ar gwag 'ra ur vag kañv,
'Hed ar stêr vras, didrouz ha skañv,
Regin goustad 'ra al latar
Hep pal na mall ouzh skleur al loar.

War ar vag voan-se ur goantenn,
'N he c'herc'henn liv al lilienn,
En hec'h astenn 'n he sae wenn-kann,
Dispak he blev hir melegan.

Hag o huniñ an hini 'mañ,
Dre-holl a-fonn ouzh he gronnañ
Bragerizioù ha bleunioù gwenn
'Lintrañ eston war ar pont prenn ?

En he gourvez divuhez-mik
Emedi didu tristidik
Haelwenn feal a Askalod,
'Garas hep fellel Lanselod.